



K R O A B R E I Z

MEZEVEN 1948 ② PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Mab da Zoue (Y.-F. Falch'un)	Pajenn	1
Dre ar Gwad (F.-W.)	—	2
Goueliou ar Miz (An Tad)	—	3
Kenta Psalm ar Binijenn (F. Guivarc'h)	—	4
Eun Tamm Skol da Yann-Azen (Petromig)	—	5
Gwazed, Mouga ha Gloaza a Rit (Ykam)	—	6
Plas ar Brezoneg e Breiz (Mari an Duff)	—	8
Ar Beleg (Brogarour - Rozec)	—	10
Ar Brezel e Breiz-Izel (Mari Sejte)	—	12
Keleier (Y.-F. ar F.)	—	15
Lennit (Y.-F. ar F.)	—	16

Korn ar merour : L. Bleunven.

Kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

War golo an niverenn-man eus Kroaz Breiz e weler skeudenn feuntenn Lokronan, tennet gant Gilles Boinet, eus Hédé (Ill-ha-Gwilen).

PRIZIOU :

An niverenn-man	25	lur	} Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.
Koumanant ordinal	200	lur	
Koumanant a zikour	300	lur	
Koumanant a enor	500	lur	

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de Plomelin, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

Danvez ar c'henstrivadegou evit ar Bleun-Brug, d'an 19,20 hag 21 a viz eost, a gavorc'h er bajenn diwezat ar golo.
Yaounankizou ha bugale, eolit ho teodou ha lemmij ho pluennou !

• MAB DA ZOUE ! •

« Hon Tad hag a zo en neñv » ! Kristen, setu ar c'homsou a ro urz ar C'hrist dit da lakaat war da vuzelezh hag en da galon pa deu c'hoant dit da bedi.

Eun devez, a lavar deomp an Aviel skrivet gant sant Lukaz (XI-1), Jezuz a oa pellaet diouz e ziskibien evit pedi. Kaer oa moarvat gwelout ar Mestr o pedi. Kerkent ha m'en devoe echu, unan eus an diskibien a dos-taas, hag en em erbedas outañ : « Mestr, deskit deomp penaos pedi ! » Ha Jezuz a respontas : « Pa bedi, lavarit an dra-mañ : Hon Tad, hoc'h ano bezet santelaet, ho rouantelezh deuet deomp... »

Hon Tad : n'eo ket Aotrou, nag Aotrou Doue, na Mestr, na Roue bras, na Krouer holl-c'halloudek, met : Hon Tad !

Allas moarvat e tremen ar c'homsou-se war hor muzelloù. Met, pegen diaes n'eo ket awechou lakaat ar spered a-unan gant ar muzelloù, eur souez eo !

Lavarout a reomp da Zoue : « hon Tad », hag e teu en hor spered, nann skeudenn an Tad, met hini ar Berner, pe Mestr pep tra, pe c'hoaz Krouer ar Bed...

Doue a zo ivez kement-se, gwir eo ! Met deuet eo e-unan da c'houlenn diganeomp implij en e gefiver an ano all dreist-holl : Jezuz-Krist, Mab-Doue, ha Doue evel e Dad. Berner ha Krouer hag Holl-C'halloudus eveltañ, a zo deuet war an douar, a-bez e Dad, da rei deomp an urz plijus-se.

Penaos e c'hellomp-ni lavarout kement-se ?

Daoust ho n'omp ket tud dister, krouet gant Doue evel an holl draou all, ha pec'herien c'hoaz war ar marc'had ?

N'omp ket zoken kaera krouadurien ar C'hrouer ! An Elez er baradoz, a zo brasoc'h egedomp, kaeroc'h ha splanno'h egedomp, pa 'z int sperejou hepken, dizammet diouz pouez ar c'horf, ar c'hig pec'her.

Ha koulskoude, daoust hag ar grouadurien all, an beol hag ar stered, ar c'hoadou hag ar mor bras, a c'halv Doue o Zad ? Nann ! Embañ a reont hepken, pep hini en

e yez, eo bras ha kaer an Hini en deus o c'hrouet.

An Elez zoken, daoust hag e kanont e kaerderiou ar baradoz kanaouenn an Tad ? Nann ! O fedenn eo : Santel, santel, santel eo an Doue bras !

N'eus nemedomp-ni, an dud, hag a c'hellfe, daoust d'hon izelegez ha hor stad reuzeudik, lavarout dirak braster-meur an Aotrou Doue : O Tad, c'houi eo Hon Tad a zo en neñv !

Perak eo roet ar galloud-se deomp, ha deomp-ni hepken ? Abalamour m'hon eus gounezet anezan hon unan ? Nann, sklaer eo, rak dirak an Aotrou Doue, n'hon eus gwir ebet nemet evit afizav ez omp pec'herien !

Dre vadelez Doue evidomp, hepken, eo bet roet ar galloud souezus-se ! Plijet eo bet gantaf, abalamour d'ar garantez en deus evidomp, hon dibab a douez e holl grouadurien, evit ober ac'hanomp e vugale.

Eus uhelder e skabell, an Hini a zo bras-divent, en deus taolet warnomp-ni eur zell a drugarez, karget eus an holl garantez divuzul a verv en e Galon evidomp.

Hag evit sevel ac'hanomp, tud keiz, uheloc'h kalz eget hor stad, dreist an holl grouadurien, Doue en deus degaset war an douar e Vab : « Hag ar Ger, Mab-Doue, en deus en em c'hraet den, ha d'ar re o deus degemeret anezañ, en deus roet galloud da veza bugale da Zoue ». (St Yann, 1, 12).

Dre Hor Zalver Jezus-Krist, Mab-Doue, setu ni-holl, kristenien, savet e renk gwir vugale an Aotrou Doue !

Rak galvet omp bet, pep hini ac'hanomp, da zegemer ar vadeziant, he deus hor staget ouz ar C'hrist, roet perz deomp en e vuhez a Vab-Doue, hag evelse, omp deuet da veza heñvel outañ, bugale da Zoue.

Evel ma lavar ar C'hrist da Zoue : « va Zad », gant an doujafis hag an deneridigez a welomp skrivet e pep pajenn eus e vuhez, hag e gasad

d'ar maro evit plijout d'e Dad, evelse, ni ivez, dre ma 'z omp kristenien, deuet da veza unan gant ar C'hrist, hon eus galloud da lavarout da Zoue, gant an hevelep doujañs ha teneridigez : « Hon Tad ». Gwelit neuze pegement en deus Hon Tad karet ac'hanomp, pa c'hellomp dougen an anao a vugale da Zoue, ka pa 'z omp kement-se e gwirionez ! » (I St Yann III, 1).

Arabat deomp ankounac'haat hon anao gwirion !

Roomp d'hor pedennou blaz ha saour ar garantez tener a dle beza e kalon eur mab evit an Tad madelezañ.

Roomp dezo Hou ar fistañz, da heul : gortozomp digant an Tad holl c'halloudus kement tra a zo eur mad evidomp, hag evitañ : na vezomp ket poaniet ma nac'h ouzomp ar pezh a gredfemp hor mad hag a vefe e gwirionez eun droug evidomp, tud berrwel !

Kirrhigomp hor buhez, tamm ha tamm, d'an Hini a zo Hon Tad hag a c'hortoz diganeomp, en dizro d'e garantez, n'eo ket hepken soñjou mat ha komzoù kaer, met ivez testeni leal ar garantez : hini an oberou mat, graet hervez bolontez Doue, daoust ma vefe skulzder ha gwad ouz o heul !

Evelse e reas Jezuz, Mab-Doue, en hor raok : evelse e ramp-ni, mibien Doue, dre nerz ha dre c'halloud ar C'hrist en hon ene !

Y.-Frañsez ar FALC'HUN


Dre ar gwad.

O Maro leun a lorc'h, le c'hortoze Jezuz.
Dindan ar bez, en eur c'hoarzin, en eur vragal.
Mei Hen a ziskennas, dispart, er bez tenval,
En eur zispenn ar c'horf hag an arched euzus.

Evelse, dre ar gwad e c'hano pep viktor.
Evelse, dor ar baradoz a vo digor.
D'ar re 'zoug war o fenn eur gurunenn roz-ki.

'giz moniz, n'eus nemet ar boan, ar baourentez.
Hag en den a yelo da lez al levenez.
Mar lenn en oabl skedus kleizenn ar Pemp-Gouli.

F. W.



Goueliou ar Miz

Miz Mae eo miz Mari ;... Miz Mezeven eo hini ar Galon-Zalver.

Ar c'hristen mat a gar mont bep gwener kenta ar miz d'an oferenn hag ouz an Daol zantel en enor d'ar Galon-Zalver ; met ouzpenn-se, e-pad miz Mezeven e vez laouen o vont aliesoc'h c'hoaz da gomunia, hag o kinnig d'ar Galon Zalver e oberou, evit rapari an dismegañs a vez taolet warni gant an dud ha, dreist-holl, ar pezh-se eus a vez graet bemdes, dre ar bed, enep ar Zakramant meulet-ra-vezo.

Kalon Zalver Hor Zalver n'eo nemet karantez, madele ha trugares. A-hed ar miz-mañ, enoromp anez, pedomp anez kalonek ha la komp enni hon holl fiziañs. E-kreiz an trubuilhoù a zo bremañ e pep korn eus ar bed, n'eus nemeti hag a c'hellfe hor saotei ha rei deomp ar peoc'h.

4 MEZEVEN. G. GOUEL AR GALON ZAKR. — « Kalon Zakr Jezuz, ho pet truez ouzomp ! »

13 MEZEVEN. S. PEVARE SUL GOUE AR PANTEKOST. — « Doue eo va sklerijenn ha va alividigez. Perak kaout hon ? »... Lakomp atao hor fiziañs en Aotrou Doue, greomp e pep tra e volontez santel, hag e c'hellomp beza dinec'h ; er hoan kouls hag al levenez e roio d'omp ar skozell hor pe ezomm.

17 MEZEVEN. Y. SANT HERVE. — Ar zant-mañ, — unan eus brasa sent hor bro Breiz, — a voe ganet dail. Ne welas morse sklerijenn ar bed-mañ, met gant daoulagad e ene ec'h anavezaz mat an aotrou Doue, ha meritout a reas, dre e zantelez, gwelout a hed an holl amzerioù sklerijenn d'indus ar Baradoz. An ene hag ar Baradoz da genta... a-raok pep tra !

20 MEZEVEN. S. PEMPVET SUL GOUE AR PANTEKOST HA GOUEL ITRON-VARIA-RUMENGOL. — « Ma n'oc'h ket santeloc'h eget ar skribed hag ar Farisianed, ne deoc'h ket da Rouantelezh Doue »... Evit mont d'ar Baradoz, n'eo ket a-walc'h dougen an anao a « gristen », — kement-se neo ket diaes, — ret eo ouzpenn ha dreist-holl heulia al lezenn gristen. Soñjomp er vat e kement-se : goulenomp digant Itron-Varia-Rumengol rei deomp da intent eur wirionez ken talvoudus ha kasomp deiz e pep mare eus hor buhez ar hedenn gaer a gasas deiz ar roue Gralon war e dremenvarn !

Itron Varia Rumengol,
M'it ouzin na 'z in da goll !
Pedit ivez ho Mab Jezus,
Ma vezin gantan evurus !

24 MEZEVEN. Y. SANT YANN-VADEZOUR. — « Te paotrig, te a gerso, dirak an Aotrou da gempenn dezañ an hent »... Pep hini a zo merket dezañ gant an Aotrou Doue eul labour d'ober war an douar-mañ, met an holl, n'eus forz e pe stad e vefent, a die, evel sant Yann-Vadezour, kempenn an hent d'hor Zalver da vont betek an eneoù... pe, ma karit, hencha an eneoù war-du ennañ. Kement-se a vez graet dre ar c'huzulioù hag ar skouerioù mat. Pijet gant an Aotrou Doue ma vezo kavet en hon touez kalz kristenien galonek d'ober war an douar-mañ labour talvoudus-meurbet, sant Yann-Vadezour !

27 MEZEVEN. S. C'HOUEC'HVET SUL GOUE AR PANTEKOST. — « Jesus a lavaras d'e eiskibien : truez am eus ouz ar bobl »... Ar c'homzou-se, Jesus o lavar ivez da bep-hini ac'hanomp ha goulenomp a ra diganeomp rei an don dezañ da sklerijenn ha da zavetei an deiz keiz a zo tromplet gant an drouk-spered ha gant ar bed, hag a va dinec'h ha dizeblant war hent an ifern. Daoust ha digalon a-walc'h e vezomp evit ober skouarn vouzar dezañ ? Daoust ha n'hor bezo ket ivez, truez ouz ar bobl evel Jezuz, hor Mestr ?

29 MEZEVEN. M. SANT PER HA SANT PAOL. — Gant an daou abbot kalonek-mañ Hor Zalver en deus gounezet d'ar feiz kristen broioù a-bez. Petra ne rafe ket ganeomp-ni ivez, hirio an deiz, ma vefomp holl kristenien vat leun a garantez evit Doue hag an nesa ?

AN TAD.



PSALMOU ar BINIJENN

« Kroaz Breiz » a zo lorc'h enni o c'hellout embann, a-unanou, ar « Seiz Psalm a binijenn », lakaet e brezoneg, e barzontez mar plij, gant an Ao. Gntiwarc'h. — Ar c'hristen glac'haret a luskello e boan a bec'her ouz lusk ar Psalmou, mouez an Aotrou Doue ; hag a zesko ive en em dret gant muioch a fizians etrezek e Dad madelezes a zo en neñv.

Gant an Ao. F. Guivarc'h
Person Landi.

38vet Psalm

Domine ne in furore tuo...

Doue, kounnaret holl, 'kreiz ho puhanegoz
Na dit ket d'am gourdrouz ha d'am skei digernez.
Ho pirow lemm em c'horf a zo sanket gwall zoun ;
Dindan ho tourn pounner eo brevet va c'haloun.
Em c'hroc'hen hag em c'hig, n'eus ket eun tachad yac'h.
Nag em eskern eur mell divac'hagn awalac'h.
Va fec'hed a zo bet pennabeg d'ho kounnar ;
Va fec'hed eo en deus ho touget d'am diskar.
Rak, bernia pec'hejou dreist va fenn am eus grêt,
Ha siouaz d'in breman, ganto me 'zo gwasket.
Henvel ouz eun darzod, henvel ouz eun den dall,
Am eus karet an droug, renet eur vuhez fall,
Ha breman, setu me gwriet eus ar gwas.
A c'houlkou flierius, dalc'hmât o tiskarga.
Kroumet oun em daoubleg, held en deiz en enkreiz.
Hag eun tan leskidik o tevi va c'hroazleiz ;
Em c'horf paour, penn da benn, eun tachad yac'h n'eus ket.

Va nerz a zo aet kuit, va c'horf a zo torret ;
Talmi 'ra va c'halon, ha yudal a rankan.
Doue, anaout a rit kement tra a c'hoantaan ;
Pegement e onelan, Doue, her goût a rit.
Stank e sko va c'halon, rak va nerz 'zo aet kuit
Va daoulagad ouzin, a nac'h ar sklerijenn ;
N'eus mui den war va zro ; va mignoned zoken,
Va holl amezeien ; ha va c'herent tosta ;
Ar pella dionzin eo ganto ar gwella.
An dud hag ar garfe va gwelet maro-mik
Hag ar re a c'hoanta va lakaat reuzeudik,
A stign din rouedou, ha war o muzellou
Ne glever hed an deiz nemet ar malloziou.
Epad an amzer-ze, me a ra ar bouzar ;
Ober a ran ar mut, chom a ran dilavar ;
Henvel-poch ouz eun den stanket e skouarniou,
Henvel-poch ouz eun den n'eus ger gant e c'henou.

Rak ennoc'h eo, Doue, e lakaan va holl fizians ;
Hag e vezin ganeoc'h skoazellet, emichans,
Pegwir, dre va tac'hed, karget holl a enkreiz,
Ec'h anzavan ouzoc'h, breman va fallentez.
Ya, lavaret a ran : « Ra jomint hep c'hoarzin
Ar bern tud fallakr-ze hag en em zav ouzin
Distera ma welont va zroad oc'h horjella :
Rak, bez' emañ war var, marteze, da goueza,
Ha va foan gwall-galet ne baouez d'am brouda.
Enebourien am eus, disteal, diniver,
A gasa ac'hanoun, hep abeg d'hen ober,
A ro d'in, pa c'hellont, an droug evit ar vad.
Hag a glask trouz ouzin, war zigarez m'oun mat.

Aotrou, C'hout, da vihana, n'am dilezit biken ;
Ezomm am eus e vijec'h, dibaouez, em c'hichen ;
Diredit 'ta, buan, da rei din ho skoazell,
O Salver benniget, Aotrou Doue Santel.

Eun tamm skol da Yann-Azenn

— Da biou eo ar vugale ? D'ar gerent.
— Piou en deus roet buhez dezo ?
Ar gerent.
— Gant piou e vezont savet ? Gant ar gerent.
— Piou a vag anezo ? Ar gerent.
— Piou a wisk anezo ? Ar gerent.
— Pa vezont klafiv, piou a ra war o zro ? Ar gerent.
— Piou a entent outo ? Ar gerent.
— Piou a bae ar medisîn evito ? Ar gerent.

— Piou a bae al louzou dezo ? Ar gerent.

— Ma reont eun taol fall bennak, piou a vezo tamallet ? Ar gerent.

— Dirak al lez-varn piou a respon-to evito ? Ar gerent.

— Ma renont eur vuhez fall piou a vezo disenoret ? Ar gerent.

— Pa viot deuet koz ha kabac'h, pa gouezot klanv, piou a vezo gwaz-a-ze dezo, ma vezont dilezet gant o bugale ? Ar gerent adarre, na petra-ta !

— Ha pa vezo deuet ar mare da zibab ar vistri pe ar skoliou a vezo kempennet enno spered ha kalon ar vugale, n'o defe ar gerent ger ebet da lavarout ?

Hag e vefe nac'het outo peadra da c'hellout kas o bugale d'ar skol a blij dezo ?

An dra-ze marteze a anver ar justiz, « al liberte » hag an « egalite » e vez Yann-Azenn, met e vez kement den en deus daou wennegad skiant-prena dindan e dok kement-se n'eo nemet laeroñsi, fallagriez ha dislealded.



HA GOUZOUT A RIT KONTA ?

E skoliou ar gouarnament :

er skoliou izel (<i>primaires</i>)	4.200.000	bugel.
er skolaou (<i>secondaires</i>)	250.000	bugel.
er skoliou-micher (<i>techniques</i>)	100.000	bugel.

er skoliou libr :

er skoliou izel (<i>primaires</i>)	1.200.000	bugel.
er skolaou (<i>secondaires</i>)	275.000	bugel.
er skoliou-micher (<i>techniques</i>)	400.000	bugel.

Ma vefe ret d'ar gouarnamant kemerout en e garg an holl vugale a zo er skoliou libr, e koustfe d'e yalc'h bep bloaz :
ouspenn 10 milliard 500 million.

Diwar goust an dud a fell dezo beza libr ha mestr war o bugale, ar gouarnamant a zastum bep bloaz :
ouspenn 10 milliard 500 million.
Eun tamm justiz, mar plij !

PETROMG.

Gwazed, mouga ha gloaza a rit!

DISTALLET eo diouz merenn, tomm eo an amzer, ar wazed a zo oc'h ober o c'houk.

Mari-Janig a zo hec'h-unan er gegin vras, azezet ouz an daol, branket war e divrec'h e kroaz...

He spered a zo o c'haloupat pell diouz Run an tan, hunvreal a ra er c'hêriou bras el lec'h m'eo eürus ar merc'hed ha ma vez graet stad anezo.

Bet eo, er zul araok, e bodadenn an Y. K. A. M. hag ez eus bet lavaret dez e c'hell beza eürus war ar maez Koulskoude n'eo ket eürus.

N'eo ket c'hoaz al labour-korf eo a ra dez klemm, ne ra nemet ober ar peñ a rae he mamm d'hec'h oad, hag, a drugare Doue, yec'hed he deus ha nerz; kalon d'al labour ne ra ket diouer dez kennebeut. Petra'zo'ta?

Er galon eo emañ neiz au eürus-ted. Gant eun netra e vez gloaset evel m'eo awalc'h eun netra da goll fuñz eur vleunenn.

Er mintin- mafi eo savet da genta evel m'eo boazet; he mamm a zo he zro bremañ da ziskuilza p'eo 25 bloaz ar verc'h. Ha bec'h dioustu d'al labour, goude eur bedennig verr; enaoul an tan evit lein, goro ar zaput, lakaat tro en dieneze. An eil war lec'h egile setu an holl war zao. Enaer a-zevri gant lein. N'emañ ket awalc'h war he zu Mari-Janig, poan-benn he deus bet epad an noz, ha berr eo bet he c'houked. Boudinellat a ra he fenn. Kavout a ra dez e diet d'ar re all kompren eo pounner he malvennou ez eus tres ar skui- zder war he dremm. Hen ober a rafent ma taolent evez an distera, met pep hini a zo gant e-unan gant e voued, gant e gazetenn, gant e gaolou... Ma c'houlenne outi unan pe unan: «Ha kousket mat az deus Mari-Janig? Mezaon out kuz?», e velle divc'hiet he c'halon hag e kontfe laouen he foan: «Eun tamm poan deñt en noz; pell oun bet araok kousket, met dispos oun evelkent; eur ruilh a zo awalc'h d'am oad.» Den n'en deus rannet ger war ar poent-se. E-lec'h tridal, e chom difiñv kalon ar plac'h, difiñv ha rivet.

Unanet eo, er vuhez hag el labour, ar re holl a vev en ti; ar c'halonou evit-se a vez alies yen an eil ouz eben, nemet eun dra bennak a vras a



zegouesfe, hag e teuont da zic'hlanha a vare da vare pe gwasoc'h c'hoaz da galedi.

Dec'h edo ar zul. Goude merenn eo bet Mari-Janig e pardon Itron V-riar Maeziou, er barrez tosta. E soñjedo gwelet eur c'hamarad sou- dard d'he breur, Yannig ar Por- tezer; eur miz araok, da gelfiver pardon Sant Yann, en devoa graet sellou tener outi ha paeet madigou dez. Sevel ha diskenn a reas meur a wech, gant he c'hamaladezed, an hent bras hed-a-hed ar stalioù hag ar c'hoarioù a bep seurt. Yannig ebet ne zeuas betek enni... Mari- Janig a zo distroet abred d'ar ger, pignet buan d'he c'hambra da jefic'h he dilhad — en em fitcha he doa graet, a c'hellit kredi! — evel m'he defe mez eus he ficherez bremañ p'emañ hec'h-unan pell diouz trouz ha cho- lori ar foar, ha mont da lakaat koan war an daol.

Nebeut a varvailhou gant koan.

«Petra, eme he breur dez, a- bred eo echuet an abadenn gant par- don Maria da vihana, foar fall ac'h eus graet, mezaon?»

«N'am boa foar ebet da ober!»

«Koulskoude am boa gwelet Yannig ar Portezor o vont war an tu-ze ha me gonte edos o klask perc'henn; foeltret eo an traou etrezoc'h'ta?»

«Daoust ha me' ra forz eus da Yannig, me?», emez, gant eur mouze'hoarz disliv ha yen.

Ar breur kosa a c'hoarz gros: «O! goût a ran n'eo ket mank ar re all a gari... pa gari!»

Ha kaketerez ar seurt-se alies! 25 bloaz he deus gwasket eo! Gouela a rafe, met moustra'ra war he c'halon. Eur c'henderv dez a zo deuet d'o- ber eun droiad, o klask warlec'h ha- dou.

«Ac'hanta, Mari-Janig, plac'h yaouank atao? Hepdale e yezi mat da ober eur voereb. Hast afo'ta rei friko deomp!»

«Amzer'zo!» he deus-hi res- pontet, ha troet he c'heñ gant ar geniterv war zigarez renka ar bolen- nou el listrier. Kasas e kav santout war he choug sell goapatus he c'hen- derv.

He zad d'e dro en deiz all:

«Petra' zo bet kontet deoc'h'ta adarre e bodadenn an Ykam gant an Aotrou Kure? Ar re yaouank-mañ gant o Ykam hag i a gav dezo e raint kalz gwelloc'h eget o zud?»

Gouzout a ra ez eus lorc'h en he zad o veza m'eo penn-reñerez he strollad, goût a ra eo prest da zifenn an Ykam pa vez unan bennak o klask dispeni an emzao. Perak neu- ze kaketal dirak an dud? Karet he defe lavarout an traou kaer disple- get dezo: ar t'hoant o deus holl da welout gwellaenn o tont e-touez an dud diwar ar maez war bep tachenn, ar mennad start a zo en he fenn: chom war ar maez kousto pe'zgousto pa'z eo ken stank ar re a deo' war du ar c'hêriou, mirout start ar feiz er vro ha de'chel d'ar gizioù koz, fur, breizek ha kristen. Ne lavaro netra, n'he do ket bet ar blijadur da zigeri he c'halon moustra a ra warnañ, ka- ledi a ray eun tammig muloc'h, ka- ledi a rank evit padout hag berzel; gwella pe'z'zo du-ze e bodadennoù an Ykam he deus tro adarre he c'halon da vleunia ha da zigeri.

«O emez, eur bern traou a zo bet kontet deomp, met ankounac'h- haet em eus dile. Eus hor gwella e raimp ivez, evel m'hoc'h eus graet.»

He breur ivez eun devez all:

«Deñt eo ganez adarre avat! Da vleoc a zo rodellat evel re eur maout ha da droc'houzous nevez a rofe da gredi out unan eus merc'hed an «terminal». Pa'z i d'ar vourc'h evel-se, n'eo ket sell a vo ouzit. Taol evez ouz ar chas atao da zianaout a raint moarvat.»

«Ro peoc'h'ta, eme an tad gant eun hej d'e skoaz, sotoc'h-sota ez eont bemdez.»

Mari-Janig a boagn da lakaat bo- kedou da zvel el liorz hag hirio eo fichtet kaer an deaz-simnal hag ar

prenestr. Echu eo ar pred ha n'en deus den taollet evez na lavaret grik diwar-benn-se.

He breur en deus gwelet kouls- koude.

«Mari-Janig emezañ, n'eo ket kempennet va bragez glaz, moar- vat?»

«Sell'ta, nann avat! N'em eus ket bet amzer.»

«Gwelloc'h az pefe graet hen ober e-lec'h koll da amzer gant bo- kedou.»

Hag aet ar filpad adarre.

«Piou a zo bet oc'h aoza merenn hirio, eme an tad?»

«Me» eme Vari-Jannig, nec'- hamant war he dremm.

«Anat eo eo dimezet Seza.»

Gwazed, perak beza'vel-se, daic'- hmat, dizeblant ouz kement a vez graet en ti o klask ober blijadur deoc'h? Ne goustfe ket deoc'h eur gerig a veuleudi, hag eur bann-heol e vefe ho komzou war galon ar merc'hed evit ar rest eus an deiz. Perak kaketal hep paouez? Diwar c'hoari eo a livirit: «diwar c'hoari ne zeu netra d'ar ger» a lavare ar re goz; gloaza a rit hep gouzout deoc'h, kaledi a rit kalonou hag o deus ezomm da jom tener ha karantezus evit ar vugallioù a glasko gwrez en o c'hichen eun devez, mouga a rit ka- lonou hag a vefe eur fréalz evidoc'h diskiñza eun devez en o c'harantez veo.

Y. K. A. M.

Diwallit ho chatal
Klozit ho parkier
gant **LES EIFFE**
SOCIÉTÉ LA CLÔTURE ÉLECTRIQUE
30 rue Saint-Augustin - Paris (2^e)

Plas ar brezoneg e Breiz

Ar brezegenn-mañ a zo bet displeget gant Mari an DUFF, da geñver gouel ar brezoneg, e Kleder, bremañ eus eun nebeud bloavezhioù. — Ar peñs a oa gwir neuze a jom gwir hirio, ha lennerien Kroaz Breiz a vezo laouen o selaou ar c'homzou a bouez o doa graet berz dirak Klederia; ne gavot amañ koulskoude nemet ar pep brasa eus ar brezegenn; pennadou a zo bet displeget dre zlouer a blas.

« Lakit en holl Miorzou, bep bloaz, [kals a vleuniou, Ha d'o c'hutuilh, en o c'haer, kals a [vugalilou ».

C'hoant am befe da lavarout hi-roc'h eget Mariana Abgrall : ra vezo klevet ar vugalilou o komz, o kana, o pedi Doue, e brezoneg.

Va Mignonezed.

Ar peñs a ra eur vro, ar peñs he laka da veza disheñvel diouzh ar broioù all, eo, da genta ha dreist pep tra, he yez. Eur bobl a c'hell beza gouarnet gant diavezidi, met keit ha ma tale'h e yez, e tale'h, etre he daouarn, al c'houez aour he zi.

Ni a zo mibien vihan eur bobl sebezus : rouantelezhioù kaer a zo bet savet gwechall gant hon tud koz e Breiz-Veur, du-hont en tu all d'ar mor, hag amañ e Breiz vihan; diskeret int bet an ell goude eben. Met eun dra a zo hag a zo bet savet ganto, hag a jom atao ganeomp, hag eo hor yez. Eus genou ar vamm o vervel eo kousezet e genou ar verc'h, hag eus genou ar verc'h eo kousezet e genou ar verc'h vihan : treuzet he deus ar c'hantvedoù, hag hirio kouls hag er pempvet kantved, e c'hellomp lavarout gant ar baz Tallezin :

Hon Doue a garomp, hor Yez a [viromp.

Eun dra gaer kenañ eo an dra-ze : rak pa virer ar yez, e virer ar pen gwella eus ar peñs a ra ar ouenn ! Ar yez eo ene ar vro !

Pell hag hir amzer omp bet ha ne daolomp ket evez awal'h ouz an teñzor-ze n'eo ar brezoneg. C'hoant am eus zoken da lavarout ez eus en deiz hirio c'hoaz, eleiz a Vretoned ha pa gomzer dezo eus traou o bro a zo ken dall hag an den bet ganet an dala. Sklerijenna an dudou keiz-se, setu aze kefridi plac'hed yaouank ha priedjou yaouank Breiz.

E pep pobl e kaver tud reuzedik ha n'o deus ket ezomm e kinniged dezo tregont diner evit gwerza o bro : e Breiz int stankoc'h c'hoaz marteze, eget e bro all ebet war an douar. Met al levrioù, ar c'hazetennou, an dud a zo er c'hargou ne deuit morse

a-benn eus hor gouenn keit ha ma chomo en o zav, tud yaouank ha mammou speredek e Breiz. Ar re-mañ eo dreist-holl gwella skoazell ar vro, ha keit ha ma komzint brezoneg d'o bugale, n'eus ezomm ebet da gaout aon evit an amzer da zont.

Siouaz, a nevez zo, ez eus daou gleñved oc'h en em skigna dre Vreiz : an *Dizouez*, hag an *Divrezonega*, daou glenved hag a vez alies o tigeri haent an ell d'egile.

Ya, Breiz, bro ar Zent, a zo oc'h en em zizouea a-nebeudou : e tiez a zo, Doue n'en deus plas ebet ken, hag e weler enno bremañ an dud o vont d'o gweleou, diouz an noz, hep pater na noster, evel eur bern tousigi o vont d'o zoullou. Penaos eo kousezet ar Vretoned-se ken izel all ? Divrezoneget eo bet ar vugale gant ar gerent, hag evelse ar vugale o deus d'o zro dizouezet o c'herent : penaos e vefe pedet asamblez e lec'h ma ne oar ar gerent nemet pedennou brezonek hag ar vugale pedennou gallek hepken ?

Setu perak, brasa torfed a c'hellfe ober eur vamm, e Breiz goude mouda ar feiz e kalon he bugel, eo mouda ar brezoneg en e c'henou. Ar vamm hag ar plac'h yaouank o deus bet an teñzor-ze : roet eo bet dezo evit m'her rofent d'o zro, d'o bugale. Ha pa welan mammou ha plac'hed yaouank, anioù breizat eus ar re gaera dezo, gwad breizat eus ar re yac'ha o redek en o gwazied, o c'halleget ouz o bugaligoù pe ouz o breudeur bihan, e ya kounnar en-noun. N'eus ket tro da lavarout nan : Bretoned omp, hag an ano-ze a c'heller kaout lorc'h ouz e zougen : chomomp eta Bretoned, penn-kil ha troad !

Hag arabat eo evit-se kredi e vefe enebourez d'an deskadurez, war zigarez ma tifennan gwirioù ar brezoneg, pell ac'hano zoken ! Rak

seul-vui e vo desket ar Vretoned, seul-vui e karint o bro hag o yez, peurliesha.

Deski ar yezou all, ouspenn ar brezoneg, a zo mat ? Sur alwac'h ! Ha teir ha peder war ar marc'had, gwelloc'h c'hoaz, gant ma ne deuit ket avat da zistroada ar brezoneg en deus ar gwir kenta e Breiz. Derc'hel d'hor yez hag he c'harout dreist an holl yezou all ; he lakaat da vestrez en hor spered, p'emañ-hi er gêr, hag ar yezou all da blac'hed dindanni, he skriva dalc'hmat, he finvidikaat, he c'homz e pep lec'h ouz kement hini he anavez, hep mont e galleg nemet an nebeuta ma c'heller, setu aze petra die ober pep gwir Vreizadez ma fell deñz e chomfe he bro-Vreiz en he zav.

Eur yez hon eus, ha n'eo da bobl all ebet : hon hini eo, savet n'eo bet gant hon tud, ha pa gomzomp anez emamp er gêr. Dante, barz brudet an Itali, hag en doa ranket beva eur penad en harlu, a lavar deomp pegen c'houero e kave bara an dud all, ha pegen garo an hent pa ranke pi-gnat pe zisken dre zereziou an nesa. Pa rankomp presta dilhad eun all ne vez ket kals a lorc'h ennomp : hag e vefe lorc'h ennomp pa rankomp presta dilhad gallek da wiska ar peñs hon eus da lavarout d'hor c'hen-vroiz !

Mammou Breiz, deoc'h-c'houi eo dreist-holl da veza mammou ho pro ! Poania a dleit da gas ho tiegez en dro, met poania a dleit kement all, da vout ouz ho pro, hon tiegez bras, da goueza en he foull : hag hep brezoneg, n'eus Breiz ebet, sklaer eo ! Na pebez galloud a zo etre ho taouarn !

Ha pebez koll evit an deskadurez e Breiz, ma yafe ar brezoneg da get. Rak ar brezoneg desket mat gant ar c'hrouadur e tal e vamm, epad c'houec'h pe zeiz vloaz, eo al c'houez an holl yezou all. Evit rei nerz d'am c'homzou, e lavarin deoc'h ar skouer beo-mañ : warlene e oa daou Vreizad, yaouank oc'h echui o studioù e skolaj Lesneven, unan eus Gwinevez, egile eus Plouider. Betek o zeiz vloaz, n'o doa komzet nemet brezoneg. Daoust da-ze, pe welloc'h moarvat abalamour da-ze, o deus bet ar prizioù kenta epad seiz vloaz e latin hag e gregaj, hag o daou o deus dibradet ar priz-enor evit ar galleg !

Nann, ar brezoneg ne ra droug ebet d'an deskadurez, pell ac'hano. Va unan am eus graet sko. da verc'hedigoù epad tri bloaz. Evit kelenn

dezo ar galleg, e komzen dezo alies gant sikour ar brezoneg, hag e skouerioù ; ha m'hen asur deoc'h, ar gerioù hag an troioù-lavar gallek, desket evelse, a jome skrivet sklaer en o fenn !

Diouz ma lavar Tolstoi, ar c'hilheien-raden, pa veajont a vandenou bras, en em gemer evelhen evit treuzi ar sterioù bras a gavent war o hent : ar re genta eus ar vandenenn en em daol war o fenn en dour, a vil vern, betek ma teu o c'horfoù maro d'ober eur pont d'ar re all da dremen. Ar boan hag ar maro evit buhez ar re all ! Ret e vo ive da veur a Vreizadez en em rei a holl-galon evit buhez Vreiz hag ar Brezoneg. En eur ober evelse, ec'h hadimp levezenez en hon tiegezhioù, e kasimp sonioù lirzin adreuz hor meazhoù, hag hor pedennou breizat betek ar baradoz.

Gwin mat !

Sant Tomaz Morus, Stallour Bro-Zaoz en amzer Herri VIII, n'eo ket eun den da brena oa.

Eun devez, eun aotrou bras, hag a dlie beza barnet gantañ, a gasas dezaf diou voutailhig arc'hant, evit e lakaat diouz e du.

Ar zant a reas o leunia gant ar gwella gwin en doa, hag o c'has en-dro, en eur lavarout da vevel an aotrou : « Displegit d'ho mestr, ma kav mat va gwin, e c'hell dont da gerc'hant anezaf pep tro ma plijo gantañ ».

//////////////// KINNIGOU //////////////////
100 lur al linenn
hanter briz evit ar goumananterien

— Da werza, mekanikoù da skriva, evit buroioù, ez nerez.

— Da werza, dastumadenn Gwalarn en e fez ; kinnig eur priz.

— A brenfe paper koz diouz ar c'hant kilo ha diouz an donenn.

— Da werza, da lakaet da c'horioù, riou houadez « Kaki Campbell » : 50 lur.

AR BELEG

Ar be-leg war an dou-ar a zalc'h lec'h

Hor Zal-ver Rak-se gant a beg gwi-rion

eun eil krist her gal-ver. Gant Je-sus pa'z eo

kar-get ouz hor sil-vi-de-gez, Ran-nomp

de-zeñ ka-ran-lez, e-nor, senti-di-gez.

(Ar c'hantik-mañ a zo bet savet gant an Tad Rozec, S. M. M., heñvel ar c'hantik a varo. Krouez Breiz a zo laouen ouz e embann en enor d'an hini a gasas heñvel Breiz hag ar Vretoned.)

E gana a c'heller evit ofrenn genta eur beleg nevez (eman ar mare dizala!), pe evit gouel ar velegraj.

Ma ve re hir da gana penn-da-benn, a c'heller rei heñvel, d'hor mennoz, ar c'houl-bladou II, IV, V, VI ha X.

Davet Jezuz, Hor Zalver, savomp holl hor mouez,
Ma vo danvez beleien, ha kals, en hon touez :
Goulenomp ouz ar Werc'hez ma vo meur a gristen
Ho klevet ar gomz santel : beleg out da viken

II

Ar beleg, war an dou-ar, a zalc'h lec'h Hor Zalver.
Rak-se, gant abeg gwirion, eun « eil Krist » her galver.
Gant Jezuz, pa'z eo karget eus hor silvidigez,
Rannomp dezan karantez, enor, senti-digez.

III

Daoust ma c'houlenn, alies, chom e stad izelek,
Ne 'z eus ket talvoudusoc'h eget karg ar beleg.
D'e vamm, nag eul levenez ! Na tro da lorc'h e dad !
Evit holl dud ar barrez, nag eun enor gwir- vat !

IV

Pep beleg, digant Jezuz, en deus bet gourc'hemenn
Dra brezeg an Aviel betek eur an tremen.
Bez' e tle, gant e skleurenn, a-zioc'h ar bed skedi.
Pa gomz deomp eus e gador e rankomp e gredi.

V

Ar beleg eo hor mignoun en hor buhez a-bez.
Warnomp e veilh, gant aked, eus ar c'havell d'ar bez.
Dezan eo d'hor badezi ha d'hor genel d'ar C'hras :
Hen a vennig an eured, hen d'ar vered hor c'has.

VI

« Kerzit dre holl, er bed-man, ha badezit pep den ».
Al lezenn-ze, disehan, war ar beleg a ren.
Setu gant an dour santel ma ro perz d'an ene
En eur vuhez dreist-natur, perz e natur Doue.

VII

D'ar gristenien, pa gouezont, gant ar youlou trec'het,
Ar beleg en absolvenn a walc'h saotr ar pec'hed.
Kerkent en ene gloazet e c'hoarvez ar pare,
Ha buhez er re lazet a zired adarre.

VIII

Kempenn a ra d'ar c'hristen, epad an oferenn,
Bara c'houek ar Zakramant, ar founusa merenn.
Da dre ar gomunion, pa ginnig an Osti,
Er beleg, ouspenn Jezuz, e tleomp gwelet Mari.

IX

Rak ma 'z eo d'an tad gounit bara d'ar vugale,
D'ar vamm eo d'hen diskoipa d'an eil ha d'egile.
Ar beleg, ministr Jezuz, en deus e gwirionez,
Ar gwir da veza galvet : beleg ar Vamm-Gwerc'hez.

X

Ar beleg, evel Jezuz, eo pastor an denved,
Hag a glasko gant preder an danvad dianket.
En e zell, bepred chomomp, pa ziskouez deomp an hent
An hent a gas hep fazi betek palez ar Zent.

BROGAROUN-ROZEC, S. M. M.

Imprimatur,

Kemper 29 a viz mae 1948

J. COTTEN, Viket-vras.

Ar Brezel e Breiz-Izel

AR PEZ A C'HOARVEZAS E KLEDER
D'AR 6 A VIZ EOST 1944

GANT MARI SEITE

Kendal'ch (1)

EUN DIVERRA EUS AR PENNAD KENTA. — An Alamaned, fuloret a c'hoari o c'hil e bourg Kleder hag en tiegestiou wardro. Tiegez Mari Site a zo ianfoeltret ganto. He-unan ne oar ket petra eo deuet he zud da veza er reuz. Glazet eo bet ; epad eur siouladenn, he deus gelllet kemer an hent a gas d'ar bourg, evit mont da gempenn he gouliou da di ar medisin.

Neuze e teuas unan eus ar zoudarded en ti en eur youc'hal : « Terroristes, ici ! Terroristes, ici ! »

Hardisaet adarre eun tammig, ez is war-du ennan, en eur lavaret gant eur vouez ankeniet : « Ici, fraülein hepken ! fraülein hepken ! ». Met e-lec'h beza teneraet gant va c'homzou, e youc'has d'in chom peoc'h pe, emezan, en eur viza ac'hanomp gant e fuzuilh, edon o vont da veza lazec'h.

Ne rankas ket lavarout muioc'h.

Eul lamm a ris war-du dor ar porz, met an den fallakr a daolas d'in etre va zreid eur c'hreunadenn. Houtman a darzas dioustu hag e santis va dilhad bibradet evel gant eun avel vras, met hep santout an distera poan.

Kement a voged a lezas ar c'hreunadenn war he-lerc'h, ma n'en em weled mui en ti. Mont a ris er maez, en despet d'an tri Alaman a oa e-kichen an nor. Ha neuze, hep sonjal mal petra a raen, ez is, pennfolet d'en em deurel a-benn kaer e-touez ar zoudarded war an hent. Eno deuet ennon va-unan, am boe eur zouezenn o welet daou gouerriad krog e penn o c'hezeg, hag unan anezo o lavarout d'in va ano gant eur vouez ken doaniet ! Goude e teuas d'in da zont e oa ar paotr yaouank-se eur c'hamarad-prizon d'am breur Per, dizro eus an Alamagn na bet ouz hor gwelout bloa bennak a oa.

Eun dizamm e oa evidoun o c'haout eno. Mont a ris war-du enno, en eur grial outo, goulenn digant an dud diskiant-se lezel o buhez gant ar re a gave d'in o oa chomet en ti...

Ne voe ket roet amzer d'ezo da respont d'in. « Raoust ! » a voe lavaret d'ezo, hag e rankjont kerkent mont adarre en hent.

Gant spont eo e sellis outo o pellaat, ha me o chom va unan e-touez eur vandenn soudarded fuloret, marteze hanter-vezo, eur c'halz anezo ? N'eo ket ennoun-me va-unan eo e sonjen, met kentoc'h er re a oa dindan an dismantrou. Hep ehan e c'houlennenn truez evito. Allas, avat, n'am selaouent ket ; dalc'hmat e koueze an tennou war ar marchosi. Ankounac'haet am boa edo ar wazed kuzet eno, ha n'am boa ken preder nemet gant va mamm baour.

Met setu eun Alaman o tont d'am c'haout, eur groaz ruz gantan war e vrec'h. Hen da vihana n'en devoa ket an aer da veza ken fuloret hag ar re all. Lavarout a reas din e galleg :

« Vous, blessée, mademoiselle ! » C'houi, gloazet, dimezell !

Hag e sellis evit ar wech kenta ouz va divesker, hag e chomis sabatuet o welout e oant ruz holl gant ar gwad.

Spontet meurbet, e c'houlennis digantan ha grevus e oa va gloazet.

Sellout a reas outo en eur heja e benn, hag e lavaras d'in : « Allez immédiatement trouver le médecin français ». It dioustu da gaout ar medisin gall.

— Ar medisin, emeze, a zo er bourg, hag a-barz erruout eno e vezin diskaret hep douetans gant ar zoudarded !

— Arabat d'eoc'h kaout aon, emezan en eun doare hegarat. Deuit d'am heul.

Araok en em lakaat en hent, e taolis c'hoaz eur zell karantezus war va zi paour hanter-ziskaret, a oa gantan, dindan e zismantrou, va inamm gêz, Liz, Annaig hag eun amezogez, maro breman marteze !

Hag e sonjis : va dever eo d'in mont da glask sikour d'ezo..., ar medisin, pe ra beleg...

Ha me yao en hent, kenver-ha-kenver gant va difennour, pe va zalver, etrezag ar bourg, kroaziet ganin va daouarn hag o pedi a-hed an hent.

Ne greden ket selleut war va lerc'h, o veza m'edon dalc'hmat o c'hortoz eun tenn bennak em c'hein.

★ ★

En em gavout a ris koulskoude er bourg, hep droug ebet. N'am boa gwelet den war an hent. Ar bourg a oa evel maro : n'oa ket eur penn kristen war ar ruioù.

Dre al linenn ez is da di ar medisin. Skei a ris war an nor. Gant prez e teuer da zigeri din. Sebezet e chomer ouz va gwelout ruz-gwad. Va zontj-din avat, a oa er re all chomet du-hont er gêz, dindan an dismantrou.

En em erbedi a ris ouz ar medisin, rak heñ, marteze, a c'hellfe c'hoaz rei zikour dezo ; met lavarout a voe graet dezaf gant eun all eus an ti n'helle ket, heñ, riska e vuhez evelse, rak tremen a rae atao an Alamaned war an hent.

Sellout a reas neuze ouz va gouliou. C'houec'h drailhenn-zir bennak a oa em divesker ; a drugare Doue, hini ebet anezo ne oa bras, nag aet doun er c'hig. Eur « bikadenn » a reas din, enep droug-ar-c'haro.

Frañsiz ar Bras, eus ru-Gastell, ha Viktor Treger eus Sibiril, a oa ivez e ti ar medisin, bet en em gavet em raok. O daou e oant gloazet evel doun.

Frañsiz en doa paket eun tenn en e c'houzoug, p'edo o sellout dre ar prenest e-kreiz an noz. Kaout a rae dezaf gwelet an Amerikaned o tremen... Euan avat e voe diskouezet dezaf peger bras oa e fazi... Pa zeuas ar mintin, ha goulo an hent, e kabalas da vont da welout ar medisin.

Viktor a oa en em gavet gantañ kement all, en eur zellout el lukarn. Dont a reas dre al linenn d'en em louzaoui da Gleder. En e skoaz eo e oa gloazet.

An tennou a groze bremañ war ar bourg. Eur spont 'oa klevout an trouz. En em starda a raemp en eur c'hougn eus ar zal-gortoz, an daou c'hloazet unan a bep tu din ha pep hini anezo am frealze gwella ma c'helle, o klask rei din da gredi ne oa erruet netra, marteze, gant va zud e ger.

Kaer o devoa avat, va spered a chome darbaret kenaf ganto. Seblantout a rae din o gwelout o c'houlenn sikour !... Daoust hag o gwelout a rafen c'hoaz ?

Eun hanter-eur bennak e padas an trouz iferniñ-se. Pebez frañzidigez pa baouezaz !

(1) cf. Kroaz Breiz, miz mae, p. 12.

E-doug an amzer-ze, ar medisin, evit merka gwelloc'h e di, ha mirout dre-ze na vefe tennet warnañ, a lakaas a-istribilh outañ, banniel ar groaz ruz.

Neuze ar medisin a lavaras d'e wreg e oa poent dezafi mont d'ober e labour.

En despet d'an Alamaned ha da bedennou e bried ez eas d'an ti-kêr. Eno, en deziou araok e oa bet graet eur post-sikour, ha marteze e oa ged dezafi.

Va goulou bremañ a stage d'ober eun tammig poan din.

En eun taol setu an nor o tigeri : eur vaouez o tont en ti da glask ar medisin evit an If Korr gwall c'hloazet.

Allaz ! avat : hemañ a oa en ti-kêr.

Den ne grede mont d'e glask.

Neuze e welis dirak va doualagad an daolenn skrijus-mañ : va zud dindan dismanstrou an ti mac'hagnet, hanter-varo... o c'hedal eul louzaouer bennak da astenn dezo o buhez... An If Korr o tiwada, o vervel tamm-ha-tamm, e dud endro dezafi o ouela, oc'h en em c'houlenn hag abred awalch eoc'h-erruo ar medisin...

Ya, kalet e rankfen beza bet ma vijen chomet dizeblant dirak eur seurt taolenn... Kinnig a ris mont betek an ti-kêr. An holl a skrijas ouz va c'hlevout.

« Mont evel-se, da unan, e-touez kemend all a soudarded ! petra zofjes merc'h paour ! » emezo din.

Va buhez, emeve, ne dalv ket kalz a dra mar deo lazet va zud !...

Annaig Yvon en em ginnigas da vont ganin. Mont a ris eta, krog en he brech'h, en eur jilgammat, e-kreiz ar bielez kounnaret.

Dar anezo, o welout va divesker leun-wad en em ziskoueze evel doaniet war va ziskour.

En em gavet dirak an ti-kêr, ez is evit digeri an nor ; allas ! avat, poan gollet e oa, Neuze, an eil hag eben ac'hanomp e voemp fallgalonet. Met setu eun ofiser bras o tont war-zu ennomp, hag o lavarout din en eur galleg fraez :

— Vous êtes blessée, mademoiselle ? (c'houl a zo gloazet, dimezell ?)

— Ya, a respontis dezafi, mouget gant an anken, hag emaoñ o klask eur medisin.

— Ar medisin a oa aze, n'eus ket pell, a elgerias din, hegarat.

Heja a ris adarre an nor... Met allaz, poan gollet !

Neuze e teuas eur zoudard da gaout an ofiser, hag e lavaras eun dra bennak dezafi en alamaneg.

Hemañ a lavaras din neuze : « Ar medisin a zo aet war-zu a-hont, hag e tiskouezas din hent Ploueskad. Kompren a ris e oa aet ar medisin d'e gêr dre an hent treuz.

da gendec'hel

Dalc'hit dieub an 22 a viz eost : ezomm a vo ac'hanoc'h e gouel ar Bleun-Brug, e Kastell-Paol. Eun devez kaer e vo !

KELEIER

Evit kelennadurez ar brezoneg.

Bodadeg ar Vistri eus Rann al Lizerennou kaer, e Skol-Veur ar Stad, e Roazon, he deus nevez kaset da Vistr ar Deska-durez e-Paris, ha d'an holl Gannaded eus Breiz, an hetou-mañ evit kelennadurez ar Brezoneg :

« L'Assemblée de la Faculté des Lettres de l'Université de Rennes en sa séance du 8 mars 1948 :

1) Emet le vœu que des cours de breton soient autorisés à titre facultatif et organisés dans les Lycées, Collèges et Ecoles Normales de Basse-Bretagne, comme l'ont été en Provence des cours de provençal, en application de la circulaire ministérielle du 30 juin 1945 ;

2) Que les fonctionnaires habilités à donner cet enseignement soient délégués par le Recteur de l'Académie de Rennes sur avis de la Faculté des Lettres ;

3) Renouvelle un vœu en faveur d'une épreuve facultative de breton aux deux parties du baccalauréat.

4) Maintient son opposition formelle à l'introduction en tout domaine de son ressort, de la réforme de l'orthographe bretonne, improvisée le 8 juillet 1941, à l'instigation de l'occupant, et n'admettra jamais cette orthographe scientifiquement condamnable dans aucun des examens dont elle a le contrôle. S'en tient, en matière d'orthographe bretonne, à la situation d'avant-guerre, mais ne s'opposera nullement à une réforme présentée par des personnes scientifiquement compétentes après un examen sérieux de la question. »

Le Doyen : G. MAYER.

Met an dra a vefe gollet rebech d'an hetou-ze, moarvat.

Pell awalch 'zo emañ ar Vretoned o c'hortoz ma ve roet d'o yez an enor a zo dleet da gement yez, en eur vro-ha n'he deus en he genou nemet ar ger a « frankiz » evit ma-katemp disterik marteze ar pez a zo goulennet...

Ne fell ket deomp koulskoude c'hoari soubenn-drenk.

Hag abalamour da-ze, Kroaz-Breiz ne c'hell nemet beza laouen o welout an « dud e plas » o kemer pelloc'h eun tamm preder gant nor brezoneg a zo en o c'harg a vistri uhela e Breiz, evel m'emañ e karg kement Breizad, a vev dindan heol lugernus an Aotrou Doue.

Hetomp, d'hon tro, na ve ket graet, eur wech muioc'h, skouarn vouzar ouz gwirioù sakr ar Vretoned, ha ma ve sevenet eur goulenn-ha n'eo na marlonk na foll ! Deomp ni Breizad, da harpa eus hon tu !

Y.-F. ar F.

Breiziz ! Degasit deomp keleier ! Kroaz Breiz a zo ha tra - grit implij anezi.

Skrivit d'an Ao-Y-F. ar Falc'hun, kelenner e kloerdi bras Kemper

— Ar Bleun-Brug a zav ive d'eur vuhez nevez ! Ar gouel bras a vo e Kastell-Paol, d'an 22 a viz eost.

AN DOKEN. NERZ HA YEC'HED.

Petro eo an doken ?

E Breiz e vez laket dindan an ano « tokenn » an holl glenvejoù a gistruj an dud yaouank. An dokenn a zo eun nor digor d'an droug-skevent, droug ar roue, eskiji, trousekennou war ar c'hroc'henn, bosou e gouzeou ar vugale drouk-livet, ha meur a dra c'hoaz.

Selaout mat : eul louzou dispar, hag anavezet e pep lec'h tost da hanter kant vloaz 'zo, a bare pla ar c'hlenvejoù-ze. Plou n'anavez ket, plou zoken n'en deus ket implijet meur a wech an *Ulmicine* Moreul, doctor-apotiker e Landern ? Dalc'hit sonj mat, mammou, eo an *Ulmicine* alc'houez yec'hed an ti.

Bugale krenv ha livet brao ho pezo ma rit implij eus al louzou-ze. Sonj am eus eur medesin soudarded hag a lavare : « El lec'hioù ma vez gret implij eus an *Ulmicine* em eus kavet ar c'hrenva paotred yaouank da vont da soudarded, hag el lec'hioù-ze ivez e kaver ar braoa m'erc'hed.

Al louzou galloudus-se a gavor e pep apotikerez. Met diwallit a veza fazlet, ha sellit mat ha merket eo war ar boutailhoù *Ulmicine* Moreul.

E gwerz e pep apotikerez.

« Niverenn genta KROAZ BREIZ a zo bet daleet muioc'h eget m'hor boa c'hoant, ha dreze e teu diwezatac'hik niverenn mezeven. Goulenn a reomp digarez ouz hol lennerien : a-neubudou e tostaimp ouz devezioù kenta bep miz »

Lennit

ALAIN DE CORNOUAILLE : PENHOAT. (Spes, Paris, 1947. 442 pages.). Gwelit niveren genta Kroaz Breiz, p. 16.

GWENNAEL : KLOTENNOU BREZONEK (1948, 64 pajenn). — E gwerz e ti « M. l'abbé Luguern, directeur de l'Ecole Saint Joseph, Plabennec (Finistère) ».

Deuet eo er-maez, e miz mae, al levrig a oa gortozet pell 'zo, gant kement hini a anavezas an Aotrou Cozannet, Doue r'e bardono!

An Ao. Cozannet eo, a skrive dindan an ano a Wennaël. N'en doa ket embannet kals a dra e-doug e vuhez, met kals en doa skrivet, a drugare Doue. Mall oa rei da anaot d'ar Vretoned e ouiziegezh hag ar blijadur a zo eus e lenn.

N'eo ket moulet, el levrig-man, holl oberou Wennaël, na tost zoken. Bennoz koulskoude d'an Aotroued Loëz Lok, Seite ha Luguern da veza aozet evidomp ar c'hortozenn-man, Enni e kavimp eun tanva saourus eus spered an Ao. Cozannet, eus ijin ar barz ma 'z oa, leun a fusk en e holl varzonegou, nebeut a bluennou ker flour a zo bet e Breiz betek-hen da gana ar garantez evit holl grouadurien an Aotrou Doue.

Nag eo plijus selaou gantan.

« ...trouez ar bili flour

Ruilhet dirafhet gant an dour » (p. 11).

sellet ouz an ti melen : « Savet er goudor d'an avel :

E zremm lizhin

A c'hoarza d'an heol o sevel

Diouz ar mintin » (p. 18).

hag heuilh goulennou sonzus ar bugel d'e dad koz :

« Perak ne vez ket deiz atao ?

Tad-koz, an dra-ze a vije brao » (p. 16).

Gwelit ar c'hemm pa deu ar mare da c'hrosmol : pounneraat a ra ar bluenn hag ar frazenn : « Livrit d'ho Sent koz diskouez o faperiou,

A c'hrosmol an doktor, ma welimp o gwirioù » (p. 18).

M'ho peus c'hoant avat da danva c'hoarz goapaus an Tregeriad, fin evel... trez iouarn, lennit istor Per ar Sklear « Saoutus Perus Solerus », ken anavezet e Plabennec ha tro-war-dre (p. 49).

Peder lodenn a zo el levr, dishenvel awal'h an eil diouz eben, pevar bladad er pred, kuit da inout : rimadellou, kantikou, fablennoù, hag istorioù.

Goude 'beza lennet al levrig, blaz ar, re neubeut gantan, ne c'heller nemet kaout mall da welet embann ar pinvidigezioù a jom c'hoaz kuzet ouz darn vrasa ar Vretoned : troidigez al lever saoz « Enoch Arden », hag a zo eur c'han dudius a garantez, « A-wel d'ar mor », hon eus fizians da c'hellout embann e Kroaz Breiz, « Ar Basion », hag an traou all... Kredi a rajn e vo kaeroc'h c'hoaz ar pezh a zo da zont : gwel-a-ze ! Ar pred-bras warlerc'h ar c'hortozenn, na petra 'ta !

Ar re o deus lennet niverenn genta Kroaz Breiz o deus gwelet eus peseurt gwazenn eo an Ao. Cozannet : harzoneg an « Nevez Amzer », er bajenn ziweza eus ar golo, a zo unan eus ar pennadoù moulet e « Klotennou Brezonek ».

Dre dalvoudegezh an arrez-se, eo difra barn ar bradadenn ! Prebit al levr : n'ho pege kot a geuz d'ho tri-ugent lur : eurlou dudius a dremenoc'h gant Gwennaël !

Y.F. ar F.

E PEB LEC'H
E PEB TI...
E PEB KAMBR

SKEUDENN SANT ERWAN

Gant Xavier de Langlais (Langleiz)

Ar brava skeudenn du ha melen

Priz dre ar post	{	130	lur war baper fin
gant ar		230	lur war baper kalet
mizou kas		380	lur war baper satinet

Kasit hor goulenn da Kroaz-Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

Korn ar Merour

« Gortoz an dud hag an amzer

A zo daou dra ret da ober. »

E kement a ra an den, war an douar, an diblas eo a goust. Eur wech loc'het, an traou a ya brao, war araok, peurvuia...

Setu ar pezh a zo en em gavet gant *Kroaz Breiz*. Kalz trubuilh, ha dale, a zo bet o tigas an niverenn genta er-mêz, ha setu perak n'eo ket deuet an eil niverenn-man, kennebeut, d'he foent.

Abarz pell, fizians hon eus, e resevoc'h hor c'helaouienn, e deiziou kenta ar miz, evel ma tere.

Ma z'eus deuet meur a rebech d'eomp evit an niverenn genta, ha lec'h a oa, e rankan lavarout ez eus deuet kalz muloc'h a veuleudiou.

Kroaz Breiz, gant he gwiskamant nevez flamm, he deus lakaet kalonou eleiz e Vretoned da dridal gant levez. An testenioù eus al levez-se a zo deuet d'eomp eus pevar c'horn ar vro, eus Breiz Izel, ha Breiz-Uhel, eus Bro c'hall...

Karet em befe lakaat dirak ho taoulagad darn eus al liziri kaer, ar c'homzou ken c'houek, digaset d'eomp, a bep tu, liziri ha komzou hag a ziskouez pegen karet eo c'hoaz hor yez, ha kement a ra braventez hor c'hornig douar...

Bennoz Doue d'ar re o deus digaset d'eomp gourc'hemennou mat, ha skoazell da heul o c'houmanant.

Bennoz d'ar vignoned madelezu hor zikour da skigna hor c'helaouienn ha da zastum ar c'houmanantou. An holl lavarioù ne dalvezont seurt, ma n'int ket harpet gant oberioù. Hag an oberioù, d'ar mare-man, eo digas dour deomp da gas hor milin en-dro...

Tennet ez eus bet *dek mil niverenn* er wech kenta, hag er vech-man.

Chom a ra, er vouterezh, eun nebeut hinenniou hag a vefe gellet rei, da ober embannidigez.

O goulenn digant ar mouler war eün.

Evit ma vo distroboc'h d'eomp, ne zigemerimp ar c'houmanantou nemet betek fin ar bloaz.

25 lur ar miz eo ar gelaouienn. Hervez ar miziou a jom da redet, eo aes eta gouzout priz ar c'houmanant, a vezo da bae...

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouienn : skriva da rener Kroaz Breiz : Mr l'abbé Jean-François Falc'hun, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz koumanantou ha profou, skriva da : Mr l'abbé Laurent Bleunven, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C.C.P. 21.802, Rennes.

Micherourien, tiez a genwerz !

grit brud d'ho staliou e Kroaz-Breiz !

Ar merour : M. l'abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulererz Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

KENSTRIVADEGOU ar BLEUN-BRUG EVIT AR SKOLIOU

- I. — KENSTRIVADEG AL LENN :
eur pennad eus al levr : « Me a zesk brezoneg ».
(kaout a c'heller al levr-ze digant an Ao. Séité, directeur de
l'école Saint-Jean, Tréboul. Finistère).
- II. — KENSTRIVADEG AN DISPLEGA :
a) evit ar vugale n'o deus ket 9 bloaz :
Kanaouen an alc'houeder (el levr : « Me a zesk brezoneg,
p. 35).
b) evit ar re a zo etre 9 ha 12 vloaz :
An daou vaout (el levr : « Me a zesk brezoneg », p. 52.
c) evit ar re a zo etre 12 ha 14 vloaz :
Bodadeg gant ar razed (Me a zesk brezoneg, p. 86).
- III. — KENSTRIVADEG AR C'HAN :
Eur ganaouen vrezhoneg, hervez ar c'hoant.
(ar vugale a vo renket dre rummadou, hervez o oad).

KENSTRIVADEGOU an DUD YAOUANK

- I. — KENSTRIVADEG AR C'HAN gwelit uheloc'h, III.
- II. — KENSTRIVADEG AR PREZEGEREZ :
(Sevel ha displega eur brezegenn war an destenn-man : « Petra
c'hell ober eun den yaouank, hirio, evit ar brezoneg, en oberou
kristen, er skolioù, er vuhez pemdeziek » ?
(Skrid ar brezegenn a dle beza kazet d'an 31 a viz gouere, da
ziwezata, d'an Ao. Séité, Ecole Saint-Jean, Tréboul, Finistère).

Ar c'henstrivadegou-ze a vo dalc'het epad gouelioù bras ar Bleun-
Brug, e Kastell-Paol, d'an 19, 20 hag 21 a viz eost 1948.

An devez evit pep hini a vo roet da anaout pa vo embannet roll
an tri devez gouel — Gwelit, evit-se, niverennoù da-zont Kroaz Breiz.

